

KENTOC'H MERVEL!



Oberoù-all Klaoda'r Prat "Pluenzир"

Mestr-skol kristen e Landivisiau.

1. Mouez Reier Plougastel (Goulen anezan e Landivisiau),
dre ar post 1 fr.
2. Marvailhou ar Vretoned e-tal an tan (N'eus mui).
3. An «teir C'had hag "ar Mevellaër», daou bez-c'hoari eus
ar farsusa (E Landivisiau, hag e *Kroaz ar Vretoned*),
dre ar post 0 35
4. Trubuilhou an Ao. Gargam, pezh-c'hoari farsus, dre ar
post 0 35
5. uezh arzur a Vreiz, darvoudou tennet eus istor Breiz,
pezh-c'hoari, goulen anezan gant Renerien ar *Pays
Breton*, 54, rue de la Comédie, Lorient, dre ar post 1 25
6. E berr gomzou, petra eo Trede-Urz S. Fransez, dre ar
post 0 20
7. Deut holl davet Sant Fransez, paperen da skignañ,
an 50 0 40
8. Nozveziou an Arvor, eil levr Marvailhou, dre ar post 1 75
9. Daou gantik evit tredeidi S. Fransez.
10. Feiz Kristen Iliz Rom (Sainte Religion lakeat e brezoneg).
11. Kanaouen neve Janed Ark (War don : Sav, Breiz-Izel).
12. Kanaouen ar Skolaer.
13. Kanaouen ar Vran.
14. Netra na dalv va Breiz (Kanaouen).
15. Kanaouen "Paotred Lanndi".

WAR-NEZ BEZA MOULLET :

16. Rimadellou brezonek (Trede levr Marvailhou).
17. Kentoc'h Mervel (Darvoud e tri Arvest) Kurunet gant K. B. B.

WAR AR STERN :

18. Difennour bihan ar relijion (er Feiz ha Breiz).
19. Levrig-dourn Trede-Urz S. Fransez evit tud ar bed.

10767

KLAODA AR PRAT

"PLUENZIR"

KENTOC'H MERVEL !

Darvoud c'hoarvezet epad an Dispac'h,
e tri ARVEST.

Loret gant Kevredigez Broadus Breiz
e Kendalc'h bras Kastell-Nevez ar Paou, - 1910.

Me diskara ar groaz santel !
Biken ! Biken ! Kentoc'h mervel !
PLUENZIR.



REDON

Imp. Réunies A. BOUTELOUP & Fils aîné
RUE VICTOR-HUGO

Tous droits de traduction, de reproduction, de représentation
et d'analyse
réservés pour tous les pays, y compris la Suède et la Norvège.



KENTOC'H MERVEL !

Darvoud e tri Arvest

Me diskara ar groaz santel !

Biken ! Biken ! Kentoc'h mervel !

PLUENZIR.

D'am mignon mat F. Even (Karevro)

Setu ama an dud o deus perz en darvoud :

FANCH AN TALEG, tieg.

GWENOLE, e vab.

YANN BINIFI, mevel ha trubard...

SAÏK, mesaer.

HERVE, amezeg d'ar re-ma.

Ao. KERMOGER, dijentil, rener ar Chouanted
breton.

SPARTAKUZ, kabiten ar zoudarded c'hlas.

VIKTOR,

NELSON,

KARAKAS,

LACHÈVRE,

PIEDEBIC,

RICHARD,

Ao. Person Landivy.

Soudarded breton ha soudarded gall kement
ha ma karer.

An darvoud a dremen e Breiz-Izel, war-dro ar bloaz 1794

RANNOU AN TRI ARVEST

ARVEST KENTA : War zao, Bretoned !

EIL ARVEST : An Drubarderez.

TREDE ARVEST : Maro o tifen ar Groaz.



KENTOC'H MERVEL !

ARVEST KENTA

War-Zav, Bretoned !

*(Eur c'hoad treuzet gant eun hent. En amzer an
dispac'h vras.)*

I DIVIZ

FANCH AN TALEG, *tieg* ; GWENOLE, *e vab* ;
YANN BINIFI, *mevel*

FANCH AN TALEG

Asa, paotred, koulz eo d'eomp ober eum diskuizaden,
ha ne gav ket d'eoc'h ? Evidon-me a zo o vont da lakaat
eur c'horniad. Teir heur a zo emaoomp o troc'ha keuneud,
hag e feiz ' ne ray ket droug azeza eur pennadig.

GWENOLE

Muioc'h a galon hon devezo da gregi adarre goude-ze.

FANCH

Varc'hoaz d'abardaez e rankimp echui kentoc'hik, ma
c'hellimp mont da govez abret. Nedeleg a erru, ha kalz
tud a vezo, kredabl eo, evel kustum. Daoust hag e
peleac'h e vezo kanet an oferen hanter-noz er bloaz-ma ?

GWENOLE

N'ouzon ket, va zad, n'em eus klevet netra c'hoaz. Varc'hoaz, gwir eo, e vezo abret a-walc'h lavaret an dra-ze. Muioc'h eget biskoaz e ranker beza war evez, ha gouzout dirak piou e komzer.

YANN, *d'an dud.*

Daoust ha klevet o defe eun dra bennak diwar va fenn ! Lavaret a rafed o deus difizianz !

FANCH

Gwir eo, va mab, taolomp evez bepred war hor c'homzou !

GWENOLE

An aotrou Person, d'am zonz, ne daol ket evez a-walc'h. Mont a ra kouls, en deiz evel en noz, da welet ar re glanv, da vadezi, da eureuji, da noui, e kement leac'h e vez goulennet... A-walc'h e vije d'ezan beza tapet eur wech !

FANCH

O ya da ! Mes, pa vez komzet d'ezan a gement-se, ne oar ken lavaret : « Ar pastor mat a ro e vuez evit e zenved ! » pe c'hoaz : « Evit an dra-ze eo oun bet beleget ! »

GWENOLE

N'en deus aon ebet. Gwir eo ez eo gwisket evel an disterra kouerriad ; hogen, a-walc'h eo hizio kaout daouarn flamm evit beza chadennet ha kaset d'ar maro.

FANCH

Evelato !

GWENOLE

Gwir bater, va zad. Betek eno eo eat kounnar rus an dispac'herien enep ar veleien.

FANCH

Mantrus eo, satordallik ! Ha piou en divije kredet ?

EIL DIVIZ

An hevelep re. — Eur paotr saoud a dremen en eur gana :



FANCH

Hep ! Saik !... Petra ec'h eus kavet aze adarre ?

SAIK (*o tizrei hag o tont daveto*).

Eur ganaouen nevez am eus prenet bremaik gant eur barz-baleer.

GWENOLE

Eur ganaouen nevez en-deün ?

SAÏK

Ya da ! Ha mar kirit, ma ra ze plijadur d'eoc'h, ez an d'he dibuna dirazoc'h en he hed.

FANCH

Kan anezi 'ta, paotr. An ton, brao bras war va meno, am eus bet klevet n'ouzon mui e peleac'h.

SAÏK *a gan*

O kristenien, pegen nec'hus
Eo gwelet beleien Jezuz,
Evel gwallerien distaolet.
Darn harluet, darn- all bac'hiet !

E-barz Bro C'hall ne weler ken
Nemet dre zarvoud beleien ;
Dibaot eo an oferennou.
Dibaot eo ar zakramanchou.

GWENOLE (*a dosta ouz ar paotr*).

Gortoz 'ta, Saik, ma kanin ganez, me oar an ton-ze ive : hini Seziz *Gwengamp* eo.

SAÏK

Sell, Gwenole, ama oun en em gavet !

O *daou*

Ne glever prezegen ebet,
N'eus na mision, na retred :
Allaz ! Allaz ! petra reomp-ni ?
Gant hon more'hed ne c'hellomp mui.

Kroaziou skedus a aour melen,
Ha kroaziou kaer a arc'hant gwenn,
Klezeuriou, ezansouerou,
Holl o c'haser d'an « Distrigou ».

Dioueret dioc'h an ofisou,
C'hoaz 'vit kreski hon ankeniou,
Ez eus deut e-touez an denved,
Bleizi digar, falz bastored.

GWENOLE

Gwall hir eo da ganaouen, Saik, ro d'in da baper, ma lennin an nemorant d'am zad !

Lenn a ra :

E pep bro ha dre-oll 'n hon touez,
N'ez eus nemet dizunvaniez,
Ha kasoni vras ha yenien,
Etre kerent, amezeien.

Ar breudeur hag ar c'hoarezed,
Ar priejou, dizunvanet ;
An tad, ar vamm, ar vugale,
An eil a enep egile.

Harluet eo ar veleien,
Ar roue 'zo kouezet e benn ;
An dizurz 'zo dre-oll o ren :
Peoc'h hiviziken evit den !

N'em habaskaet, va Doue,
Ha grit d'eomp-ni holl trugare ;
Digasit ho Lezen 'n hon touez,
Hag ar peoc'h hag an unvaniez !

Digasit d'eomp hon eskibien,
Hor pastored, hor beleien,
D'hon henchha holl d'ar baradoz,
Evit ho meuli deiz ha noz.

Erbedit, ni deu d'ho pedi,
Evit ho pobl, Gwerc'hez Vari,
Ha c'houi holl, sent ha sentezed,
Evit ma vefomp selaouet.

FANCH

Da ganaouen, paotr, a zo eus ar brava. Del, setu aze daou wenneg d'it da brena madigou. Kea brema da welet e peleac'h ema da zaout.

SAÏK

Kenavo, tonton Fanch, ha bennoz Doue d'eoc'h !

TREDE DIVIZ

FANCH, GWENOLE HA YANN

GWENOLE

Lazet ar roue mat Loiz c'houezekved, ar veleien direbech great an hu warno evel war loened gouez ! ... Va Doue ! va Doue ! petra deuimp-ni da veza ?

YAN AR PINIFI

Evidon-me n'em eus keuz ebet d'ar roue, d'ar breser digar ha digalon. Ya, diskaret eo ar pabor diwar e gador alaouret, hag ar bobl, en amzer da zont, a vezo bleinet gant tud eus ar bobl ; an holl a vezo keit-ha-keit dirak al lezen, keit-ha-keit dirak an tailhou, hag, evel m'eo dleet, keit-ha-keit dirak ar c'hargou. Ar bobl a vezo roue ! Frankiz da bep-hini !

FANCH

Sell ! ar glabouser en doa kollet e deod. Hag eo evit lavaret hevelep sotoniou e tigorez brema da c'henou ? ... Alo, Yann, ro peoc'h gant da stranerezu. Diouall ne deufe Doue d'az skei abalamour d'az kwall-gomzou ! ... Mes, lavar d'in, e peleac'h out-te bet o teski koms en

doare-ze ? Biskoaz betek-hen n'ez poa savet da vouez evit lavaret n'oa ket kompez an traou en hor bro, hag hizio, paour keaz den, e kavez abeg e pep giz koz ? ...

YANN

P'eo gwir e fell d'eoc'h gouzout, me lavaro d'eoc'h. Er bourg e vez brema alies, alies, bodadegou tud yaouank evel don-me, devezourien, pe micherourien, an darn vrasa anezo. Mont a ra, kredit ac'hanon, mar kirit, kalz tud da zelaou sitoianed eus Pariz pe leac'h-all, tud ouiziek, a oar lavaret brao an traou, a zesk o gwirioù d'an dud ...

FANCH

Kenkouls-all pe welloc'h, zoken, a rafent deski d'ezo o deveriou ... Va Doue ! va Doue ! ... Da beleac'h ez eomp e-giz-se ? Ha petra ra d'an hailhoned-se eus Pariz dont da glask trabaz ouz hor beleien-ni ? Peseurt droug a reont ? An nep ne fell ket a relijion evitan e-unan, a dle, da vihana, he lezel gant ar re a gar anezi ... Mar ne ra ket a vad, evit droug na ra ket ken nebeut.

YANN

Ar veleien a yoa mall bras lakaat anezo da veza evel ar re-all. Ar re-ze a zo tud evel domp, ha n'ouzon ket perak e reer kement a enor d'ezo ; ne reont netra, ha koulskoude, petra vank d'ezo ? ...

GWENOLE

Lavar 'ta, Yann, peseurt droug o deus great ar veleien d'it ?

YANN

Peseurt droug ? peseurt droug ? ... Ya droug a reont, d'in-me ha d'ar re-all ha me garfe son dizale glaz ar beleg diveza en hor bro.

GWENOLE

Da hini-te a zono kentoc'h, paour keaz dianked. Maro e vezi, ha da eskern en douar a vezo kemmesket pell a vezo gant ar bouldren, hag ar saeou du a yelo bepred a di da di, a wele da wele, da frealzi ar glanvourien geiz war o zremenvan. Dibaot eo c'hoaz, a drugare Doue, ar Vreiziz a fell d'ezo mervel evel ar c'hi. Keit ha ma chomo an Iliz en he zav e vezo beleien, hogen, hervez ar C'hrist, an Iliz a bado keit hag ar bed. Breiz-Izel a gar an Aotrou Krist, Breiz-Izel a zo kristen betek he gwrizien douna, ha dalc'hmat e vezo.

Start eo hor c'halon en hor c'hreiz
Ha startoc'h ar groaz en hor Breiz.

Ya, paour keaz Yann drubard, kaer ez pezo diskrognal da zent, kaer ez pezo kaout naon a zaeou du, gant gras ha nerz an Ao. Doue, m'hen tou ! hini ebet anezo n'ez pezo da ziskolpa, keit da vihana ma vezo Gwenole va hano, keit ha ma vezo dek biz war va c'hrabanou dir !...

FANCH

Ar c'homzou-ze, Gwenole, a zo din eus eur Breton kalonek evel-dout ; me a lavar evel-se ive. Kement Breizad a zo dre ama a zavo dizale evel eur voger eus o c'horfou da ober eun difen beo d'o beleien, ministred Roue an nenv hag an douar.

YANN

Diouallit !

GWENOLE

Diouall te, kentoc'h !

FANCH

Kerz, kerz prim eus va goulou ; ne fell mui d'in klevet hano ac'hanout, pezh fall ma 'z out !

YANN (*gant eur vouez trenk.*)

Ya, ya, mont a ran eus ho koulou, evel ma livirit ken krak ; hogen bez' ho pezo eus va c'helou, m'hen tou ! ha dizale zoken marteze... Mont a ran, tonton Fanch, hogen, gwelet a reot c'hoaz ac'hanon, c'houi pe ho penner..., ho taou, marteze... ha neuze ne lavaran ket ne deui ket a geuz deoc'h abalamour d'ar c'homzou garo a stlapit d'in hizio !

FANCH

N'hon deus aon ebet gant da c'hourdrouzou. Doue eo ar Mestr, hag, en despet d'ezo zoken, ar re fall o c'hina a rank plega d'ezan. Ne gouezo ket eur vleven eus hor penn hep e aotre...

GWENOLE

Ker e kousto d'az ler mar klaskez ober droug da unan ac'hanomp. Diouall, paotr kez, te eo az pefe keuz, sur a-walc'h (Yann a ya diwar wel.)

Pebeuz inkin fall !... Gwelet a rean eur pennad zo n'eo ket henvel an traou gant hor mevel... Mes, lezomp anezan da c'hoari e benn diot, ha komzomp a draou-all grevu-soc'h...

PEVARE DIVIZ

FANCH ha GWENOLE, HERVE

FANCH

Sell ! Herve eo a zo o vont aze... Hep ! Herve !... Pe-naos ez a ar bed ganez ?

HERVE

N'ez a ket kaer, siouaz ! Va fenn a zo tenval ha va

c'halon a zo gwasket gant an enkreiz. Eun arne eus ar gwasa a darz war hor bro, hag hervez ma welan, meur a hini ac'hanomp a vezo kaset da gozeta.

FANCH

O daonched ! Mignon paour, koms a rez evel profeded an amzer goz, ha piou a c'hello gouzout petra fell d'it lavaret ? Gwenole ama en deus eur c'helou meur espernet gantan evidomp. Edo o vont d'hen rei da anaout pa'z out digouezet. Kendalc'h gant da gaoz, Gwenole ; mar-teze ez pezo an eurvad da ziroufenna tal Herve, hor mignon mat.

HERVE

Lavar 'ta, Gwenole, petra c'h eus pe gwelet pe glevet. Aon am eus n'ez pefe netra da zeski d'in.

GWENOLE

Eur beachour eus va mignoned a zo nevez bet e Pariz.

FANCH

Ac'hanta ?

HERVE

Penaos ez a an traou dre eno ?

GWENOLE

Eur maread beleien, emezan, n'oa ket falvezet ganto ober al le da zenti ouz lezennou difeiz ar gouarnamant, a zo bet kroget enno ; ereet int bet, kaset d'ar bac'h hag ac'hano d'an droc'herez gouzougou, hep pell dale. Kaset 'zo soudardet dre bevar c'horn ar vro gant urz da lakaat touerien e pep parrez.

HERVE

Ne c'houzanvimp biken eun hevelep sakrilaj !

FANCH

Ne raimp kammed evit mont war o zro !

GWENOLE

Ni a guzo mat hon aotrou person ker !

FANCH

Ha ne vezo kavet Judaz ebet en hon touez !

HERVE

Doue r'ho klevo, va mignoned ! ... Mes, petra 'n tan-foueltr a glevan-me du-ze ? Nag a drouz ! Daoust ha petra ve a-nevez adarre en hon bourkig ken sioul peurvuia ? Mont a ran d'ar c'hleuz da welet.

FANCH

Gwel 'ta, Herve, ha dizro buan.

HERVE, o tizrei.

Eur maread tud o tremen ... Gwelet a reot anezo, mesdouet int erru trezek ama.

GWENOLE

Lavaret a rean eta ez a an dispac'h war he gwasa. Ar Vretoned a deu da heugi gant an heuz ; ar gwad a verv e gwazied ar C'helred. N'eus ken nemet eur mennoz e kalon kement Breizad a zo, ken en Arvor, ken en Argoad, ken er Menez. E kostez Kastel-Paol dreist oll, ar c'houerien a zo en o zav ; kemeret o deus fuzulou, pennou-baz, filc'hier, evit mont da heul aotrou Kermenguy ha dijentiled-all. (Trouz tostoc'h-tosta). En em denna a reont dreist-oll er c'hoajou, el leac'hio distro ; eno eo ive e roont o ursiou. War a leverer o deus betek-hen dalc'het penn, meur a wech, d'ar republikaned dispac'herien a stlej an tan, ar maro hag an anken dre gement leac'h ma tremenont. Ar Re-C'hlas, a leverer, o

deus spont rak paotred ar bleo-hir, pe paotred ar Galon-Zakr, evel ma hanvont anezo. Lod-all a ra ar Re Wenn anezo, abalamour, kredabl, m'o deus keuz d'ar roue mat Loiz c'houezek ! Mat ! ema erru warnomp an dremenidi... Petra glevan ?... Kanaouen ?... A ! ya fidan-douille ! brao eo kana p'ema ar gwad gwerc'h o ruilha en hor c'heariou evel an dour e gwaziou ar prajeier !

KANAOUEN

(er pellder, o krenvaat dre ma tosta)

Ar chas a gle-van oc'h har-zal ! Se-
tu ar zou-dar-ded c'hall ! Tec'homp kuit tre-zek ar c'hoat-
jou ! Ka-somp a - raok hor cha - tal ! Daoust hag hen, pa o-
tred Ker-ne, e c'hou-zan - vimp da vi-ken, E c'hou-zan-
vimp ar va-c'he-rien a wask al - la - bou - re-rien ?

Gwallet ganto hor merc'hed koant ; lazet mamm ha mab
[ha den ;
Lazet zoken an dud klanv paour, balamour d'o daouarn
[gwenn.

Tanet ganto ti ar beorien ; diskaret ar manerioù ;
Devet an ed, devet ar foen, er parkou hag'er prajou.

Troc'het ar gwez el liorzou, ha laket da ober tan ;
Ken na vo avalou na jistr, da nao pe zek vloaz ac'han.
Laeret hor zaout, hon ounnered hag hon ejenned, siouaz ;
Ha kaset' mesk gant o ferc'hen, d'ar c'higer d'ar c'hea-
[riou bras.

Laeret zoken traou an iliz ; pilet zoken hon touriou ;
Straojet zoken ar c'harneliou, ha skignet ar relegou.
Gwastet traoniou kaer Breiz-Izel, ken drus ha ker glas
[gwechall !
Ken na glever mui tro-war-dro mouez den, kennebeut
[chatal.

(Fanch, Gwenole hag Herve a gendalc'h gant o diviz
epad ma kân ar Re-Wenn) :

HERVE

Petra ganont ?

GWENOLE

O feiz avat, me n'ouzon ket ! n'em eus klevet mat ger
ebet.

HERVE

Mar n'eo ket erru warnomp ar chas gall !

FANCH

Kemeromp hon bouc'hili !

GWENOLE

Del, Herve, setu ama bouc'hal Yann ar Pinifi ! Gwella
pez a zo, nen deus ket sonjet kas anezi gantan !... Daoust
hag an inkin fall-ze a ve eat adarre da zealou prezegerien
ar relijion nevez ?...

FANCH

N'eus fors, red e vezo deomp beza war evez. An tru-
bard daonet-se a c'helfe noazout ouzomp dre guz ! Tos-

taat a ra ar ganaouen ! Taolomp eur zell dreist ar c'harz !
(Mont a reont da zellet).

HERVE

Brezonég a zo ganto. Bretoned int evit doare ; rak-se 'ta n'hon deus ezom ebet da gaout aon !

FANCH

Petra int ? Da beleac'h ez eont evel-se ?

GWENOLE

Bremaik e ouezimp ; toui rafen int erru dre ama !

HERVE

Emaint e kichenik avat ! Sell 'ta, anaout a ran meur a hini anezo... Fanch Kabioc'h, eus Kervilzin, a zo er penn a-raok gant aotrounez Kermoger ha Kervadiou... Mes, setu i ama !... (Ar Re-Wenn a erru tre. Ar baotred a yoa war al leur a dosta an eil ouz egile, en tu kleiz, hag a zelaou ar c'hân, gant ar vouc'hal war o skoaz. Ar Re-Wenn, e bragou-bras ha filc'hier ganto, a zoug eur Galon-Zakr war o feultrin).

PEMPED DIVIZ

An hevelep re. — Ar Re-Wenn

AOTROU KERMOGER

Deiz mat d'eoc'h, va mignoned !

FANCH

Doue r'ho pennigo, aotrou Kermoger ! Da beleac'h ez it gant an dud-se ?

AOTROU KERMOGER

Fanch kez, ha c'houi, va mignoned, va bugale a c'hallfen lavaret, keit-all 'zo ec'h anavezan ac'hanoc'h, daoust ha n'ouzoc'h-hu ket c'hoaz ema an tan hag ar gontel oc'h ober reuz bras en hor bro ? Bro-Chall, henvel ouz bag sant Per, en em wel a-bell amzer dismantret gant an avelou foll ha darbet d'ezi mont da netra... Eur maread tud trevariet o spered a zo deuet da veza mistri war ar vro hag a fell d'ezo chench penn da bep tra. Nac'het o deus o Doue, diskaret ar roue diwar e gador ha dibennet anezan evel eun torfetour.

FANCH

Mantrus eo, aotrou Kermoger !

AOTROU KERMOGER

E Pariz an asambleou, ar c'hlubou dre ama, henvel mat ouz korventennoù c'houezet gant an droug-sperejou, ne c'houlennont nemet dismantr ha brezel... Ar vugale hon eus gwelet oc'h en em zével henep o zud, ar priejou dispartiet hag ar venec'h taolet er broiou estren, d'an harlu. Brezel, tan-gwall ha lazerez, n'eus ken mui dre-oll er rouantelez : da ober pep tra ez eus frankiz, nemet da bedi Doue ! Madou ar re vras a werzer, o maneriou a zever ; tec'het a rankont eus o bro pe o c'haser d'an dibennerez. Ar roue, e bried hag e c'hoar, mezus eo hen lavaret ! a zo bet muntret e Pariz. Gwelet hon eus ar bastored kaset eus o farrezioù ; serret, saotret pe gwerzet eo hon ilizou. Hag ar veleien n'int ket eat d'an harlu, ar re o deus kavet gwelloc'h chom gant o denved a zo brema enklasket, great an hu warno evel war ar bleizi gouez, ha p'o c'haver e kaser anezo d'ar bac'h⁽¹⁾ hag ac'hano prim d'ar chafod evit beza dibennet. Ac'hanta,

(1) d'ar prizon.

Fanch, ha c'houi, va mignoned, dirak kement a reuziou, a zismantrou, a wad skuilhet hep abeg, ni a zo savet ha stourm a fell deomp, ker e werzimp hon ler d'ar chas gall, d'aoust n'omp ket gwall niverus. Ker e kousto d'ezo ha gwaz a-ze evito. Kreski a ray an niver ac'hanomp ; dont a ra Bretoned davetomp eus pep korn a Vreiz ; hor c'henvroiz a zo gwapaet, disprizet, gwasket ha merzeriet zoken e kant doare, hor c'henvroiz a glev ar gwad o virvi en o gwazied, ar vez a zav d'o zal, hag e loc'hont o youc'hal : « Torr e benn ! »

HERVE

Ha me ive a zo o vont ganeoc'h da zifen hor beleien, hon ilizou, hon c'halvariou. Tan ha kurun ! War va c'horf ez ay ar chas divezet abars kregi en hon beleien !

AOTROU KERMOGER

Ne c'heden ket nebeutoc'h diganez, Herve. Anaout a ran ac'hanout pell 'zo, ha gouzout mat a ran out bet atao eur Breton kalonek leun a zoujanz Doue.

GWENOLE

Ha me n'emaon ket o vont da jom war ho lerc'h. Me a vezo evel doc'h soudard an aotrou Doue ! Hoc'h aotre a root d'in, n'eo ket 'ta, va zad ?

FANCH

Brao eo mont evel-se da zifen an Iliz hag ar Vro ! Hogen, eun dra c'hrevus eo, va mab ; taol evez ez pezo tro meur a wech da veza tizet gant tennou fuzul ar Re-C'hlas N'out eat morse eus ar gear betek-hen, yaouankik out c'hoaz ive, ha marteze, aon am eus, e savo buan keuz ganez !!!

GWENOLE

Tamm ebet, va zad ! Arabat eo d'eoc'h beza nec'het gant an dra-ze.

FANCH

A hend-all, da vamm ha me a zo o vont war an oad, ha mar marvez er brezel, petra deump-ni da veza ?

GWENOLE

Doue, va zad ker, eo atao ar Mestr. An amzer dremenet, an amzer a dremen hag an amzer da zont a zo etre e zaouarn. N'en em jalomp ket eta gant ar pezh a dle c'hoarvezout.

FANCH

Koms a rez evel eur beleg, va mab ; anat eo ema Speread Doue ennout. Kerz eta, va faotr, ha gra bepred labour vat. Mar marvez dindan taoliou ar chas gall e vezo ebat ganen lakaat em fenn e vezi eat d'ar baradoz gant kurunen ar Verzerien.

GWENOLE

(a lamm da vriata e dad)

Bennoz Doue d'eoc'h, va zad, great hoc'h eus eur mab eürus !

AOTROU KERMOGER

Kenavo, va mignoned, ne skuizomp ket ganeoc'h, mes n'hellomp ket dale pelloc'h. Da nav heur hanter pe zek heur ember e teuot davedomp da goad Tolvezeg. Mar kavit unan pe unan eus hor zoudarded war hoc'h hent e vezo goulennet diganeoc'h : « Piou a zo dre ama ? » hag e lavarot kerkent ger ar ged : « Doue ha Breiz ! War zav ! »

HERVE

Doue ha Breiz ! Tan ha kurun ! War zay !

GWENOLE

Kenavo bremaik !...

(Ar zoudarded a ya kuit en eur gana adarre) :

Ar chas a glevan oc'h harzal ! Setu ar zoudarded c'hall !
 Tec'homp kuit 'trezek ar c'hoajou ! Kasomp a-raok hor chatal
 Daoust hag-hen, paotred Kerne, e c'houzanvimp da viken
 E c'houzanvimp ar vac'herien a wask al labourerien ?

C'HOUEC'HVET DIVIZ

FANCH, GWENOLE, HERVE.

FANCH

Va Doue ! Va Doue !... Pebeuz darvoud ! Ha piou en
 divije kredet e teuje ker prim da wir komzou hor mignon
 Herve ?... Gouzout a rean ez oa red d'hor beleien beva
 dindan guz ; ne greden ket evelato ez oa kement a riskl
 evit o buez. Deomp, va mignoned, deomp buan da bour-
 chas kement ho pezo ezom a-benn mont kuit eus ar
 gear !

GWENOLE

Deomp, Herve, da lavaret kenavo d'hon tud !

HERVE

Tan ha kurun ! War a-raok bepred, evit Doue ha Breiz !

(*Al lien a gouez*)



EIL ARVEST

An Drubarderez

(*Eun dachen war ar meaz*)

KENTA DIVIZ

YANN

(*a deu goustadik dre gleiz, Tommet mat d'ezan*)

A ! a ! a ! an Dispac'h, evit doare, ne blij ket kalz da
 Fanc'h an Ozac'h, ken nebeut ha na ra d'e benner koant.
 O ma ! e pedint Doue... hein ! pedi Doue ?... Alo, da
 beleac'h eo eat va zammig penn ? Difen a zo hiviziken, a
 berz an Nasion, da bedi ken Doue menet Danton, Marat
 ha Robespier... Ma ! Ma ! e pedint Mirabo da gompiza o
 spered !... Ne blij ket an Dispac'h d'ezo ?... Ma ! Ma ! O !
 evel a garint !... N'eo ket inti koulskoude a viro outi da
 ober he labour gaër... A ! me ra foutre, me, eus o aliou
 ken nebeut nag eus o gourdrouzou !... An nep a zo a-du
 hizio gant ar C'houarnamant a zo sur mat eus e vara
 hag eus... e benn ; eleac'h c'houi, Fanch Kouer hag ho
 seurt, hoc'h eus da ziuall rak an dibennerez, ar benveg
 burzudus-se a gas dillo da netra enebourien al liberte !...
 A ! Fanch Kouer, lakeat ec'h eus ac'hanon er meaz eus
 da di, mes petra ra ze d'in-me ? Me a gavo evelato, pa
 garin, eun tamm bara gwenn da chaokat, hag ive,
 douetus bras, eur banne chigoden da lipat eur wech an
 amzer !... O Fanch Kouer, n'oun tamm ebet nec'het
 ganez, arabat e ve d'it kredi ! Ar Republik unan ha

dirann a zo eur vamm vat, eur vamm dener, bepred war evez ne vankfe netra d'he bugale aketus. M'hen tou ! me a vezo hiviziken unan eus he gwella servicherien... hag e vezin dic'haouet a-zoare evit an taoliou kaer a rin... C'hoant c'hoarzin a deufe marteze d'ar re am c'hlevfe !... Ha koulskoude, me garfe gouzout perak !... Eun dremm dreuflez am eus marteze ?... Mec'hieg, ginaoueg, klapezen, panezen, hanoiou kaer bet roet d'in alies gant va zad ha va mamm, gwir eo !... Mes me avat am eus kredetao n'oun ket ker baltek-se, hag ez eus ennon danvez eun den, ya, mar kavan tro eur wech bennak d'en em ziskouez dirak an dud... Ha setu marteze deuet evidon ar mare-ze, pe aon am eus me deuo morse !... Neun pe veuzi, n'hellan ober ken, hag evel n'emaon ket e poan da goll va buez, me a neuio e dour rus an Dispac'h !... A ! la ! la ! Gwelet a reot, Fanch Kouer, ha te, Gwenole beg moan !... La ! la... goustadik ! Kemeromp hon amzer ! Arabat eo mont re vuhan, n'eo ket trenka a rafe ar zouben !...

M'am bije bet eun tammig muioc'h a zeskadurez oa, sac'h an dien !... A ! neuze avat e vijen bet eur pabor !... Ha piou oar, gant an amzeriou eürus-ma petra vijen deuet da veza ?... Mes, bah ! n'eus forz, deomp, atao ! gant ar pezh am eus, sur oun, me a zavo diwar va zeil ! Ar bobl a zo roue !... Me a zo roue !... Eur c'hoz tamm roue distrandel, lakaomp, mes roue evelato, hag hep dale pell me a ziskouezo va galloud...

N'eus ket da lavaret ! Me a vezo mear e Landivy, kousto pe gousto ! An holl a stouo dirazon ; bras ha bihan, paour ha pinvidik, beleg ha dijentil a raio Aotrou Mear ac'hanon ; ha mar fell da unan bennak ober re a ardou, me hen lakao da ober anaoudegez gant eur benveg hag a zo e vicher krenna... A foutre ! na me zo diot 'velkent !... Awechou... Setu em eus aze em

bruched eur voutailhad dour burzudus, hag ec'h ankou-nac'haen !... (*Staga ra ar voutailh ouz e benn*). N'eo ket fall gwin an Nasion !... A ! malloz rus ! mar en divije bet gwin evel-se da eva abaoue ma 'z eo dizonet, Yann Binif a Gervastoue ne vije ket bet plean e gov evel ma 'z eo !... Saperlotez ! n'eo ket gant yod silet ha leaz ribot e sav kig ouz an dud !... An holl vadou a yoa etre daouarn ar venec'h hag an duchentilou... Brema, da vihana, e vezo rannet ar pinvidigeziou-ze gant ar sitoianed vat evel don-me... Poent oa, fidamdoustig ! lakaat urz e kement-se ! (*Eur jachaden-all war ar voutailh*). Lezomp brema ar chigoden da domma va c'halon, ha greomp eur pennad kousket ! (*Astenn a ra e gorf war an douar hag ec'h harp e benn evit kousket*).

EIL DIVIZ

YANN, eur C'HABITEN glas.

AR CHABITEN

(o tont evel pa ne vije nemetan).

Ursiou Robespier a zo stris : Red eo, emezan, lakaat an dourn war holl veleien ar vro, mar ne fell ket d'ezo toui. Person Landivy a zo kuzet en eun toull bennak, p'eo gwir eo goullou ar presbital, mes e peleac'h ema ? Piou hen lavaro d'in ?... Eno eo ema an dalc'h ! Holl dud ar c'harteriou-ma a zo mut evel ar pesked ; pa vez great eus ar goulennou-ze outo n'ouzont nemet lavaret : « Me c'hoar, me ? It d'e glask !... » Ya, gwa-paat a reont ac'hanon, evel pa n'em befe ket pep galloud etre va daouarn !... N'ouzont ket, kredabl eo e c'hellan-me lakaat o c'hrouga uhel ha berr oc'h blenchou o dero pe

o c'has da Vontroulez da ober anaoudegez gant baskul ar Gouvansion?... Mes, bezomp habask!... Hag ouspennze, red eo d'in beza war evez, rak ar Re-Wenn a zo dre aze, evel kaouenned, « o furchal ar c'hoajou, » ha ne garfen ket lezel va ler ganto... Mar kavchen unan bennak eus ar vro! Hennez a ouiche an doareou hag a rofe skor vat d'in da ober va labour enorus, mes pegen risklus ive! (*Eur roc'haden iskis*). Peoc'h! tud a zo dre ama evit doare, hag e rean va zonzou a vouez uhel, evel eur ginaoueg (*Uhel*). Piou a zo?... Hep! paotr!... plac'h!... tosta, ma vezi gwelet! (*Krenvoc'h*). Piou a zo?

YANN

(*o sevel e benn, hanter zigor e vrennikennou*).

Hein!...

AR C'HABITEN

Sav buan, paotr, ha deus ama ma welin petra out-te. Kauen out pe ne dout?

YANN, *o sevel*.

Hein! kaouen?... An dra-ze a zo eul labouz-noz!!! Mardousien! n'ouzon ket petra en deus c'hoant an Aotrou da lavaret?...

AR C'HABITEN

N'eus ket ken a aotrouien!... Petra! n'ouzout ket c'hoaz an dra-ze? Anat eo emaoe'h-hu, Bretoned, pell, pell warlec'h ar C'hallaoued! Hanv ac'hanon sitoian. Pe Wenn pe C'hlas out?... Lavar dillo.

YANN

O Aot... Ho tigarez, mar plij! sitoian eo a felle d'in lavaret, Betek-hen noun bet na gwenn na glas, n'oan nemet eun troc'her buzug, disliv kaer, m'hen tou! En amzer da zont avat e fell d'in beza eun dra bennek *war an dour*!

AR C'HABITEN

Eun dra bennak *war an dour*! Ya, sitoian, rak evit hizio, mesdouet, n'emaout ket diwar an dour! Blaz ar gwin-ardant a zo gant da alan! Arabat e vije kemeret nemet ar pezh a zo dereat!

YANN

Eur wechig n'eo ket atao, sitoian.

AR C'HABITEN

Alo, ya, mat! lezomp an dra-ze eta, ha komzomp a draou grevusoc'h. Evel-se 'ta n'out netra hag e leverez kaout c'hoan da zont da veza eun dra bennak?

YANN

Evel ma livirit sitoian.

AR C'HABITEN

En em glevet a c'ellimp, marteze. Eus peleac'h out?

YANN

Eus Landivy sitoian. Va zud a zo o chom e Kerbasgoret, ha me a yoa mevel e Kervastoue betek an deiziouma.

AR C'HABITEN

Brao! Brao bras! Anaout a rez eta doareou an dud hag an traou dre ama. Mat, mar karez dont d'am heul me a roio d'it paeamant vraz, hep m'ez pefe nemeur a ziezamant.

YANN

O Aot... sitoian! mont d'oc'h heul! Lavaret brao a rit; mes me n'emaon ket e poan da vont eus va c'harter; n'emaon ket muioc'h e poan da lakaat va ler da ober siblen d'ar Re-Wenn, va c'henvroiz. Nan nan, ama e fell d'in chom, dindan guz, mar bez red...

AR C'HABITEN

Selaou mat ac'hanon, va faotr. N'edo ket em spered

lavaret d'it mont eus ar vro-ma, pell ac'hano en-deün ; ama eo em bezo ezom ac'hanout, ha tamm ebet e leac'h-all. An Dispac'h-ma a raio eur vad dispar e kement leac'h e vezo great d'ezi eun digemer kalonek. Ar paour kez pobl a yoa sammet a bep beac'h, n'en doa tamm frankiz, nag en e gorf nag en e spered : eur sklavour n'oa ken etre douarn an duchentiled hag ar veleien. Hogen, setu m'eo chenchet penn d'ar vaz ; an diranted a zo dic'hou-zouget pe eat d'an harlu, hag ar re a zo c'hoaz e kuz dre ama ne zaleint ket da goueza etre daouarn an dud a le-zen karget gant gouarnamant ar republik da lakaat urz vat er vro. Sell 'ta n'em eus ket c'hoaz sonjet goulenn da hano diganez !

YANN

Yann Binifi, sitoian, evit ho servicha.

AR C'HABITEN

Ha me eo ar C'habiten Sevola Spartakuz Tricotel.

YANN

O la ! la ! ! la ! ! ! Pebeus hano iskis ! Biken n'hellin miret em spered...

AR C'HABITEN

N'ec'h eus ket ezom da derri da benn gant an dra-ze. Gra ac'hanon ar C'habiten, pe ar sitoian Spartakuz. Me a zo anavezet a-walc'h. Ac'hanta, Yann Binifi, petra levereze eus al labour omp karget da ober gant ar republik unan ha dirann ?

YANN

Brao ha mat, sitoian Spartakuz, nemet eo eul labour risklus.

AR C'HABITEN

Ha ma vijemp daou ? Gwelet a ran ez out eur paotr a feson, a spered lemm, evel na gaver ket nemeur en ho

pro Breiz-Izel. C'houi dre ama a zo pell, pell warlec'h ar re-all. Ar sklerijen n'eo ket deuet c'hoaz betek ennoc'h, siouaz ! ha ne deuio ket keit ha ma chomo da genvroiz stag evel-se ouz sae zu ar beleg !

YANN

A ! sitoian ! lavaret en eus e karfen son dizale glaz an diveza anezo.

AR C'HABITEN

Hag e raimp, hon daou, hein ! Yann ?... Ro d'in da zourn. La !... Mar bezez feal d'an Nasion, bez dinec'h, ne vanko netra d'it ! Mes, mar teuez hiviziken da droi kein deomp, da ziouall ez pezo na vefez krennet... Pardon ebet evit an drubarded !...

YANN

N'ho pezet ket an disterra difizianz !

AR C'HABITEN

An hini a yoa diagent person er barez-ma, lavar d'in, Yann, pe hano en doa.

YANN

An Ao. Guilhou, sitoian.

AR C'HABITEN

Ac'hanta, ar Guilhou-ze, petra eo deuet da veza ?

YANN

An dra-ze avat, sitoian, n'oufen ket hen lavaret d'eoc'h dioc'htu. Me ne vezen ket nemeur war e dro, hag ar baotred na gomzent ket euz an traou-ze dirazon-me... Mes me gred e c'hellfed dont a benn da c'houzout.

AR C'HABITEN

Red eo a-grenn. Ya, da genta ha dreist pep tra e ran-komp lakaat an dourn war ar person, dre guz, mar bez

gellet, evit na dennimp ket re warnomp sellou ar Re-Wenn. Arabate ve e teufe ar re-ma d'en em deuler etre hon diwesker, pe emaomp rostet, rak n'eus ket kalz ac'hanomp, ha n'emaomp ket o klask ober anaoudegez ganto.

YANN

Me ken nebeut, dreist-oll goude eur seurt labour ! Pa vezo gellet gouzout e peleac'h e kuzer ar person, me ho kaso davetan dre ar strejou kuzeta.

AR C'HABITEN

Pa lavaren out eun den a skiant, ne fazien ket ; her gwelet a ran, n'em eus ket skoet e-kichen ! Gra labour vat, va faotr, ha n'ez pezo ket a geuz, kred ac'hanon.

YANN

Kredi a ran ac'hanoc'h, sitoian kabiten, ha mar kirit, me a zo vont dioc'htu da esa gouzout eun dra bennak diwar-benn person Landivy. Kerkent ha ma c'hellin, me a deuo d'ho kaout. E peleac'h, sitoian ?

AR C'HABITEN

E peleac'h ?... Mardousien ! n'ouzon dare... N'em boa ket sonjet en dra-ze... Perak n'en em gavfemp ket ama adarre ?... Al leac'h-ma a zo gouez a-walc'h, n'eus den o tarempred anezan.

YANN

Kenavo dizale, aotrou sitoian Spartakuz !

AR C'HABITEN

Kenavo, va mignon, hag arabat e vezo d'it ankou-nac'haat e labourez evit ar Revolusion, evit mad ar bobl ha silvidigez da vreudeur. Chanz vat d'it !

(Mont a reont pep hini eus e du).

TREDE DIVIZ

GWENOLE

(e bragou bras, porpan gwenn gant eur galon-zakr, tok du ledan, eur fuzul ouz e skoaz, a deu dre an tu deou o lavaret ar poziou-ma) :

Kuz da benn, heol benniget, en eur welet torfejou
Na dlefant, siouaz ! beza great nemet gant droug-sperejou.
Kenavo, Jezuz ha Mari, dispennet ho taolennou,
Ha lakeat d'ober paveou gant ar Re-C'las er c'heariou.
Kenavo, fons ar vadiziant, e leac'h e kavchomp gwechall
Nerz evit gouzant ar maro kent eget yeo an dud fall,
Kenavo, kleier benniget, a gane war hor pennou,
N'ho klevimp mui ouz hor gervel, sul na gouel, d'an ilizou.
N'ho klevimp mui o kana gaë ; siouaz ! divadez ho penn !
Teuzet, siouaz ! gant ar geariz evit ober gwenneien !

Kenavo, va zad, va mamm garet ! Mar teu ar chas gall da zilammet war ho ti, war ho loened, m'ho kleva a-bell o lavaret a-dreuz ho taelou :

« Ma vije bet va mab er gear, en defe va diouallet ! »
Mam-goz a lavare d'in bremaik :

Deus 'tre diwreac'h da vamm-goz 'deus da zouget, va bugel,
Deus war ar galon 'deus da vaget, va mabig paour, kent mervel ;
Pa zistroi endro d'ar gear 'vin eat kuit eus ar bed-ma ;
Deus ama, deus, m'az priatin evit ar wech diveza !
Hag em eus lavaret d'ezo holl, a dreuz va daelou :
Tavit va mamm, tavit va zad, nez in ket d'ho tilezel ;
Chom a rin evit o tifen. evit difen Breiz-Izel.
Reuzeudik bras eo bout (beza) gwanet ; bout gwanet n'eo ket
[mezus ;

Nemet plega d'ar skraberien. evel tud lent ha kablus !
Mar deo red monet d'an emgann, emgann a rin 'vit ar vro ;
Mar deo red mervel, e varvin, kuit ha laouen war eun dro.
Meus ket aon rak ar bolodou, na lazint ket va ene ;
Pa gouezo va c'horf d'an douar, va ene zavo d'an ee ;

A-raok, paotred vat Breiz-Izel ! entana ra va c'halon ;
 Kreski a ra nerz va diwreac'h : bevet ar relijion !
 Bevet an nep a gar e vro ! Bevet mabig ar Roue !
 Ha ra 'z ay ar baotred C'hiaz da c'hout hag bez' zo Doue !
 Buez evit buez ! tud vat ; laza pe beza lazet !
 Red ez oa da Zoue mervel evit gounit war ar bed !
 Deuet er penn ganeomp, tuchentil, gwad roueal demeus ar vro ;
 Ha Doue a vezo meulet gant kement kristen a zo.
 Hag en divez (erfin) e teuy endro e Breiz al lezen wirion ;
 Kouls ha Doue war e aoter, hag ar Roue war e dron ;
 Hag a neuze traoniennou Leon a deui glas adarre,
 Hag ar galon a zigoro gant bleun an ed hag ar gwe.
 Neuze kroaz Jezuz hor Zalver a zavo splann war ar bed,
 E-hars he zreid liliou kaer drus gant gwad ar Vretoned.

PEVARE DIVIZ

GWENOLE, HERVE

*(Herve gwisket evel Gwenole a zigouez war al leuren
 pa ema Gwenole oc'h echui e gimiad)*

GWENOLE

A ! erru out 'ta, Herve !

HERVE

Tan ha kurum !... Ya Gwenole ; enouet out n'eo ket
 'ta ? Pell oun bet. Mac'h oufez pegement a boan am eus
 bet o tispartia dioc'h va zud ! Va mamm ne felle ket d'ez
 diskregi diouzin, hag eo bet red d'in en em ziframma
 diouz he diwreac'h. Paour kez mamm ! brevet eo he
 c'halon ! N'em bije ket great kement-all evit n'eus fors
 piou ! Nemet evit Doue ha Breiz e vijen chomet tost
 d'ez. ... Ya, Gwenole, poan a rea d'in gwelet anezi o
 ouela... hag hen anzav a rankan d'it, darbet eo bet d'in
 kila...

GWENOLE

N'oun ket souezet ganez. Tenn e kaver atao dispartia
 dioc'h ar re a garer ar muia war an douar-ma. Me ive a
 zo bet eur rann-galon evidon kuitaat ar gear, kuitaat va
 zad, va mamm, a garan kement ! Mes, Herve baour,
 evit difen an Iliz hag ar veleien eo ! N'ankounac'haomp
 ket an dra-ze !

HERVE

Ha mar hon deus kalz da c'houzanv, arabat d'eomp
 ankounac'haat e vezo seul vrasoc'h hor gopr en nen-
 vou... Va Doue, roit d'eomp diwreac'h ha kalon dir.
 Diwreac'h dir evit skei kalet war enebourien hor feiz, ha
 kalon dir evit gouzanv hep klemm hag evit Hoc'h enor
 kement reuz a zigouezo ganeomp...

GWENOLE

Evel-se bezet great ! Deomp brema, Herve, herra ma
 c'hellimp, rak marvat eo n'ec'het Aotrou Kermoger o
 c'hedal ac'hanomp.

HERVE

Ya, deomp en hano Doue !... Tan ha kurum !...
 Beac'h d'an dispac'herien gall !...

PEMPED DIVIZ

YANN

(a deu goustadik o sellet piz dre-oll).

N'eus ket da lavaret, red eo d'in gwelet ar C'habiten
 Spartakuz, red eo d'in e welet dioc'htu. Ta ! ta ! ta ! n'eo
 ket gant konchennou e vev brema an dud ! Brao eo la-
 varet : Karit an Dispac'h ! Labour gaer a ra ! Roit ho

poan hag ho puez zoken eviti, mar bez red, evit he difen oc'h an diranted!... O ya, me a gav brao an dra-ze... er re-all!!!... Hogen, bravoc'h e kavfen kaout eur gwenneg bennak muioc'h em godellou evit gellou kaout eur bragez nevez da c'holo va c'hroc'hen hag eur banne chigoden da eva... (Krenv). Spartakuz! Spartakuz! n'emaout ket dre aze?... Diou gomz am eus da lavaret d'it... diou gomz hepken!... Mes, da beleac'h ez in-me d'an heur-ma da glask ar sitoian-ze?... Ema, kredable eo, o chopinata boutailhadou gwin koz, d'am yec'hed! en eun hostaleri bennak, endra ma lakaanme va c'hroc'hen e riskl da veza toullet gant ar Re-Wenn...

CHOUEC'HVED DIVIZ

YANN, AR C'HABITEN

YANN

(a wel anezan o tont hag a lavar outan e-unan)

Pa gomzer eus ar bleiz e weler e lost!

SPARTAKUZ

Sell! dizro out, Yann? N'out ket bet pell; n'edon ket c'hoaz war c'hed ac'hanaout!... Mes, sapre dien! blejal a rez evel eur vioc'h kollet ganti he leue bihan!... N'ec'h eus tamm aon ebet da veza kordennet gant pao-tred ar bleo hir? En hano an Nasion, bez habask ha komz izel!... Mes gwall abret emaut!... N'ec'h eus kavet den da zelaou ac'hanaout? Lavar buan, kavet ec'h eus ar person? Deuet out marteze da c'houlenn harp diganen?... Mes, komz 'ta!... Mut out brema?...

YANN

Ya ha nan, sitoian. Kalz goulennou a rez ouzin, ha

n'ouzon mui dre be benn en em lakaat da zibuna va c'huden! Gouzout a ran e peleac'h ema ar person. Mes labour klask am eus bet, ha panefe m'eo hir va fri, biken, nan biken ne vijen deuet a benn eus va zaol.

SPARTAKUZ

Pa lavaren d'it out eun den! Dizale eta e tigasi d'in ar sitoian person goulennet gant kement a diz gant pennou bras ar vro!

YANN

Goustadik, sitoian.

SPARTAKUZ (souezet bras)

Penaos, goustadik?... Roet ec'h eus da c'her!...

YANN

Ha te, sitoian, petra ec'h eus te roet d'in-me? Promesaou kaer ha netra ken!... Me garfe kaout eun dra bennak e gwirionez, a c'hellfen gwelet, hag a zouzefe d'in va buez. Talvezout a ra ar boan, mechanz!

SPARTAKUZ

Alo, lavar dioc'htu ec'h eus c'hoant da gaout arc'hant.

YANN

Ar wirionez eo sitoian.

SPARTAKUZ

(a glask en e c'hodellou don)

Del, va faotr, setu aze eur yalc'hadig arc'hant, p'eo gwir n'eo ket birvidikoc'h da garantez evit an Dispac'h, hag e ranker paea ac'hanout...

YANN

Te labour evit netra?

SPARTAKUZ

... Ar Republik n'eo ket prinvidik, ha ni, he bugale,

n'hon deus ket a aour da gloza gant ar bal... Hivizi-ken, da vihana, n'ez pezo mui digarez ebet evit chom hep ober ar pezh a c'houlenner diganez...

YANN

Bennoz Doue... Mersi, sitoian ! Hag a benn pegoulz e fell d'it kaout da berson ?

AR C'HABITEN (*dichek*)

Hanter-noz ! Da hanter-noz, hep mank, e vezi e kroaz ar vengleuz. N'ec'h eus ket bet fizianz ennoun evel em eus ennout... Peurvuia ne vez paeet al labour nemet pa vez echu... Diouall avat, paotr, da zeveni da c'her pe em bezo da groc'hen da ober bouteier ler d'am zoudarded !...

YANN

Bez dinec'h, kabiten !... Da hanter-noz e vezin er c'hroaz-hent gant ar beleg, pe e kollin va hano !

AR C'HABITEN

Kea eta.

YANN

Kenavo dizale (*Mont a ra*).

SEIZVED DIVIZ

AR C'HABITEN

(*o has e zourn d'e dal*).

N'ouzon ket perak em eus aon... Eun dra bennak a lavar d'in e ray ar c'hoz kouerriad-se eun dro fall d'in, pe ez a da dremen eur gwall darvoud dre ama. . Neus fors petra zigouezo, bezomp war zav ha digoromp hon daoulagad.

Al lien a gouez.

TREDE ARVEST

Maro o tifenn ar Groaz

(*An darvoud a dremen en eur c'hroaz-hent, gant eur groaz koad en dourn deou.*)

KENTA DIVIZ

YANN BINIFI ;

VIKTOR }
NELSON } *soudarded c'hlas ;*

AN AO. PERSON, *chadennet*.

YANN

Chomit a zav, paotred, ama eo ez eus lavaret d'in gedal ar C'habiten Spartakuz. Tost eo da hanter-noz ; rak-se ne gredan ket hon defe da c'hedal pell bras ! Arabat e vefe ken nebeut... Ar gaouenned o welet eo tec'het o ferson diganto a ziskrabfe hag a lakafe buan o boutou en o godellou, evit diredek davedomp. Viktor, ha te, Nelson, dalc'hit mat ho taou d'an hini a oe person e Landivy gwechall...

AN AO. PERSON

Petra, Yann, evel-se eo e komzez eus pastor da barrez ?... Me eo am eus badezet ac'hanout ; me eo am eus great d'it ober da Bask kenta... Ha pet gwech n'out ket bet pardonet ganen en hano Doue ! Ankounac'heat ec'h eus kement am eus great d'az tud pa gouezas warlene ar c'hlenved war dud ar barrez ? Hag o werza ac'hanon d'am enebourien ha da enebourien va Doue eo e tiskouezez da anaoudegez vat ?

YANN

Ne dalv ket d'it ober sermoniou d'eomp... Pell a-walc'h omp bet dindan galloud ar saeou du hagam duchentilou. Ne raio ket droug d'eomp brema kaout eun tammig frankiz ha sklerijen. Dalc'hit mat d'ezan, paotred ; arabat e ve d'eoc'h diskregi dioutan.

AN AO. PERSON

Judaz a lavare ar memes tra d'ar zoudarded a yoa deuet gantan da gemeret Jezuz... Bennoz d'eoc'h, va Zalver, da ober d'in beza ken henvel ouzoc'h !... Va Zad, va Zad, pardonit d'ezo, rak n'ouzont ket petra reont !...

VIKTOR

Goulen ive pardon digantan, kement ha p'emaout, evit an holl dorfejou ec'h eus great e kuz...

AN AO. PERSON

!!!

NELSON

N'ec'h eus netra da respont d'eun hevelep rebech ? Grevus a-walc'h eo koulskoude !...

AN AO. PERSON

Morse n'em eus great torfed ebet nag e kuz nag a-wel, nag hor c'henvreudeur ken nebeut. Evel eus Hor Zalver e c'heller lavaret diwar-benn pep beleg : Tremenet eo oc'h ober ar vad ! Lezit ac'hanon d'a c'houlenn diganeoc'h evit pehini eus va madoberou e fell deoc'h va lakaat d'ar maro...

VIKTOR

Daoust ha mat a rez ive o roi harp da enebourien ar Vro ?

AN AO. PERSON

Ne rean nemet difen gwirioù an Iliz breset dizamant gant ho mistri.

YANN

Mat eo !... Mat eo !... Peoc'h, mar plij ! N'omp ket karget da varn ac'hanout. Varc'hoaz, e Montroulez, an dud a lezen a welo petra zo da damall d'it. Ne don ket nec'h gant au dra-ze... Gwelloc'h em bije kavet gwelet ama brema ar C'habiten Spartakuz ! Hanter-noz eo, hag ouspenn, hag hano ebet anezan c'hoaz ! (*Youc'haden skiltrus ar gaouen*).

AN AO. PERSON

Dan heur-ma eo ive e oe lakeat Jezuz etre douarn e vourrevien ! (*Hou ! hou ! hou !... tostoc'h brema*).

NELSON

Ro peoc'h, personig, pe bremaik e vezo stoufet da c'hinou d'it !

YANN

Erru ar gaouenned ! Klevit ! Daonet omp !... War evez !...

EIL DIVIZ

Ar Re-Wenn hag Re C'hlas

AO. KERMOGER

(*o tigouezout gant pemp pe c'houec'h Breton*).

Kavet eo an Ao. Person, paotred ! Beac'h d'ar chas glas !

(An tri glas a dosta ouz an Ao. Person da ober kelec'h d'ezan. Ar Re-Wenn a deu d'ezo hep marc'hata).

YANN

(kerkent ha ma wel ar Re-Wenn o tont).

A ! Spartakuz ! Spartakuz ! e peleac'h e chomez ?

HERVE

(o vont war-eün da Yann)

Tan ha kurun !... Maro d'an trubard !... Dar maro, pezh vil !... *(Skei a ra eur mestaol gant Yann)*. Kea, diaoul m'hen argas ! da gaout Judas, da vreur hena (Yann a gouez d'an douar maro mik).

EUR BREIZAD

Maro d'an touseged glas, muntrerien gris hor gwra-gez hag hor beleien !

VIKTOR

Lezit va buez ganen !

NELSON

Ha ganen-me !

AO. KERMOGER

A ! Ao. Person ! nag a aon hon deus-ni bet evidoc'h ! Setu c'houi dieubet adarre, a drugare Doue ! Diouallit hiviziken !

AN AO. PERSON

Diouall rak petra ? Va dlead da genta ha dreist pep tra ! Ar pastor mat a ro e vuez evit e zenved !

AO. KERMOGER

Ya, lezel a rin ho puez ganeoc'h, chas gall, breserien daonet hor bro !... Hogen dont a reot d'hon heul, d'eomp oc'h (D'e dud). Alo, paotred, deomp ac'han ; da ober petra e chomfemp ama ?... Da c'hedal Spartakuz hag e gompagnunez ? Furoc'h eo d'eomp tec'het !

(Mont a reont holl, nemet Gwenole).

TREDE DIVIZ

GWENOLE, e-unan

Va Doue ! Va Doue !... Truez outan ! Pardonit d'ezan !... *(Stoui a ra da welet hag hen e lamm c'hoaz ar galon e kreiz Yann)*. Ma vije c'hoaz eun tammig buez ennan !... Marteze e c'hellfe dont adarre war an hent mat !... Maro eo, siouaz ! en e bec'hed... evel Judaz !... Yann, Yann gez ! Plijadur em bije bet o roi d'it eun tamm skoazel, daoust d'an droug ec'h eus great d'eomp !... Jezuz a c'hourc'hemenn pardonni... N'em eus ket a gasouni ouzit, ouz da dorfejou eo !...

Ne ran ket mat marteze o chom da droidellat dre ama !... Piou c'hoar ? Ar Re-C'hlas a c'hell digouezout pa vezin an nebeuta war-c'hed anezo !... Hag ouspennze, p'eo gwir eo maro, petra rin-me d'ezan ? *(Tenna ra e vouchouer eus e c'hodel, hag e led anezan war benn Yann. — Goude ez a kuit).*

PEVARE DIVIZ

AR C'HABITEN SPARTAKUZ ;
 KARAKAZ
 LACHÈVRE
 PIEDEBIC
 RICHARD

*soudarded c'hlas.**Meur a zoudard glas ouspenn.*

AR C'HABITEN

Ar Republik da viken !



AR RE C'HLAS

Ar Republik da viken !

AR C'HABITEN. *o sellet er c'hostez.*

Sell, sell ! eul lapouz o nijal ac'hale ! Kean buan
'ta, Karakaz, kea da welet petra eo...

Mont a ra.

PEMPED DIVIZ

An hevelep tud, nemet Karakaz.

AR C'HABITEN

Me gave d'in edon o vont da gaout va mevel Yann
ama, ha padal e ran d'eul labouz sevel diwar e neiz !!!...
O ! O ! petra eo an dra-ze ?... C'houez fall a zo !... Ha
yann n'ema ket ! (*Sellet a ra a bep tu*). A ! setu ama eun
den astennet !... Yann eo, kredabl, great tro wenn gan-
tan, hag en em roet da ober eur c'houisk da c'hedal
ac'hanon !... Yann !... Yann ! Grik ebet ? Maro out ?...
Gwelomp ! (*Stoui a ra da zellet, hag e tilamm ar mou-
chouar*). Maro !... Yen sklas eo ! ! !... A ! Gwelet a ran
brema petra rea va labouz dre ama ! N'eo ket red evit se
besa bet e Montroulez o teski beza diviner ! Ar Breizad
gwenn-ze eo a zo deuet da zieubi ar person, ha goude
eo en em lakeat da skei war ar reuzeudik-ma, betek
m'hen deus lazet anezan !... Mes koulskoude, daou zou-
zoudard a yoa gantan !... Petra int deuet da veza ?...
Nan, tan foeltr ! n'eo ket ker sklear ha ma kave d'in !...

C'HOUEC'HVED DIVIZ

An hevelep tud. — Karakaz ha Gwenole

(o tont dre gleiz).

*(Lachèvre a ya dioc'htu d'en em lakaat en tu-all
da Wenole).*

AR C'HABITEN

(o kenderc'hel gant e gaoz).

Bremaik ni welo... Salud d'it, Chouan daonet ! Te eo
hep mar an hini en deus lazet an den-na ?

GWENOLE

Ouzin-me eo e komzit ?

AR C'HABITEN

Hep mar ! Ouz piou all e vefe ken ?... Respont prim
ha lez an hardou-ze !

GWENOLE

N'em eus lazet den, nag'hennez, nag hini-all ebet !

AR C'HABITEN

Lavar d'in neuze 'ta petra reez dre ama...

GWENOLE

Petra rean dre ama ?... E feiz, c'hoanteet em boa gou-
zout pe ez oa maro an den-ze, pe n'oa ket !

AR C'HABITEN

Evit e beurgas mar n'oa ket eat c'hoaz ?

GWENOLE

Tamm ebet ! pell ac'hano !... Evit roi dourn d'ezan
da zevel oa !

AR C'HABITEN

It da gredi ar seurt-se !... Lavar d'in piou eo en deus lazet anezan, mar n'eo ket te an hini eo.

GWENOLE

.....

AR C'HABITEN

A ! ne fell ket d'it lavaret ?... Edos ganto, ha ne fell ket d'it o gwerza !... Mat a rez !... Mes al lezen a zo stris war gement-ma. Pep den paket o stourm ouz e vro a dle beza lakeat d'ar maro er peder heur warnugent. Evel-se 'ta, kablus pe didamall eus maro an den-ma, te a baeo evit da genvroiz : gwaz a-ze evidout !

LACHÈVRE

(da Wenole e pleg e skouarn).

Goulen trugarez digant ar c'habiten !

GWENOLE

Me goulen truez digant enebour va Doue, va Feiz ha va Bro-Breiz ?... Nan, teir gwech nan ! Biken ! Biken !

AR C'HABITEN

Mat eo !... Mat eo !... N'oun ket douget ken nebeut da gaout truez ouz enebourien an Dispac'h gloriüs ! Great e vezo d'it da stal dizale, paotr brao ! Da ler a zamanto !...

PIEDEBIC

Sitoian Kabiten, eur mennoz a deu d'in. Gwelet a ran eur groaz aze, evel a zo kement anezo e Breiz-Izel. N'ankounac'hait ket ez eus roet urz d'eomp d'o diskara, abalamour ma 'z int arouezioù ar sklavaj er vro gez-ma chomet a-bez betek-hen dindan holl-c'hallou-degez Iliz Rom...

AR C'HABITEN

Ac'hanta, Piedebic, lavar buan da vennoz.

PIEDEBIC

Goulen a ran ma vezo lezet e vuez digant an den yaouank-ma...

AN HOLL (souezet bras).

O !!!

PIEDEBIC

Lezit ac'hanon da echui va lavar !... gant ma teuy da ziskara dioc'htu ar groaz-ma dirak hon daoulagad !

AN HOLL (gant levenez).

A !!!

AR C'HABITEN

Red oa beza evelhout Piedebic evit kaout an dra-ze ! Da vennoz a zo din eus eur zoudard republikan ! Ni paotred an amzeriou nevez, n'emaomp ket o klask tro da denna o buez digant an dud, pell ac'hano ! Gwelloc'h e kavomp gwelet anezo o tilezel a galon vat o follenteziou, o diskianterezoù... Roi a reomp hon foan hag hon amzer evit ma teuo hor c'henvroiz da zilezel o c'hredennou sot ha ma tigorint pelloc'h o spered da gredi ar pezh a garint.... Rak-se, paotr yaouank, en em zavet enep da Vro hag a dle beza lazet varc'hoaz a dennou fuzul, mar karez e kavi ar frankiz da vale, mar karez e weli adarre da dad, da vamm, da vreudeur, da zous !

GWENOLE

Ha petra 'm eus da ober evit an dra-ze ?

AR C'HABITEN

Nebeut a-walc'h a dra : diskara ar groaz-se a zo aze.

GWENOLE

Roit d'in eur vouc'hal !



AR C'HABITEN

Frankiz d'ezan !

KARAKAZ

Brao ! Brao !

AN HOLL

Brao ! Brao !

GWENOLE (a gerz d'ar groaz).

(E vreac'h gleiz a ra an dro da droad ar groaz, eur vouc'hal en e zourn deou, troet ouz ar Re-C'hlas) :

Mar touchit ouz ar groaz-ma, me zo prest d'he difen ;
Nep a zailho warnezi a vo faoutet e benn !...

EUR ZOUDARD GLAS

Goustat ! Goustat ! Kaouen !... Koueza raio da lorc'h abarz nemeur !

UNAN-ALL

N'eo ket te evelato a deui' a-benn eus tud kalet eveldomp-ni !

EUN TREDE (gant faë).

Sec'h da fri, prenvig douar ! a-raok dont d'ober gwap ac'hanomp !

GWENOLE

Tostait brema, chas gall, tostait 'ta, boued an ifern !

KARAKAZ

N'am eus aon ebet razout ! (Mont a ra d'ezan... Eur c'hrogadig. Karakaz, trec'het, a gouez d'an douar).

GWENOLE

Setu kaset unan da gaout e dad Lusifer ! Da biou eo an dro ?

PIEDEBIC

Eur vez e ve d'eomp beza trec'het gant eur seurt pa-nezen ! (Mont a ra ive da esa trec'hi war ar Breton kalo-nek. — A benn eur pennadig e kouez d'an douar en eur huanadi. Mes Gwenole a deu e vreac'h da skouiza gant ar vouc'hal ; red mat eo d'ezan diskouiza.

AR C'HABITEN

Diskar, diskar buan ar groaz !

GWENOLE

Nan, nan, klevit mat, biken eur seurt torfed ne rin, Kant gwech ha mil gwech mervel a zo gwelloc'h ganin. Ama, ô Kroaz venniget, e-harz ho treid santel, Evit Jezuz, va Zalver, me zo prest da vervel !

RICHARD

(hep lavaret ger, a gerz da Wenole hag zank e gleze e kalon ar Breizad. Disken a ra kerkent en eur lavaret) :
Ema great e stal d'ezan !

AN HOLL

Brao ! Brao ! Richard !...

GWENOLE

(o stoui e benn).

Jezuz !... Mari !... (e vreac'h a jom stag ouz ar groaz).
(Youc'haden ar gaouen ; Youc'hadenou-all oc'h ober hekleo d'ez).)

AR C'HABITEN

Klevit ! ema erru ar Chouanted ! Arabat e ve dezo kaout ac'hanomp dre ama ! Dre ar c'hreiz-de e teuont, kredabl eo, deomp war-zu ar vourc'h. Chachit ho tiwes-ker ganeoc'h, paotred ! (Mont a reont holl dre an tu deou. — Youc'haden ar gaouen ; hekleo adarre).

SEIZVED DIVIZ

Ao. Kermoger hag ar Re-Wenn.

AO. KERMOGER
(o tont da genta)

Petra welan, va zud kez?... Gwenole o tiwada! Allaz! Allaz!... Re zivezat!... Great eo ganto an' torfed heuzus! *Mont a ra betek Gwenole*). Paour kez merzer!... A! gwelet a ran petra zo c'hoarvezet!... Posubl e ve? Ar chas gall o deus eseet en em gemmeret ouz ar groaz, ha Gwenole e-unan ouz kement-all a dud en deus dalc'het penn d'ezo... Sellit aze an daou zispac'her ledet gantan d'an douar! A! ma vijemp digouezet eun tam-mig abretoc'h ne vije ket c'hoarvezet kement-all!...

(*Gwenole a zigor e zaoulagad goustadik, hag a ra eur zell nec'het en dro d'ezan. — E benn a gouez adarre, hag, e keit-se ar Re-Wenn a zigouez hag a ra an dro d'ezan. Gwenole a zav goustadik e benn adarre*).

AO. KERMOGER
N'eo ket maro!... N'eo ket maro!...

GWENOLE
(o kas e zourn d'e dal).

Petra zo c'hoarvezet?... Va Doue!... va Doue!...

AO. KERMOGER, (*Da eur Gwenn*)
Kerz buan da vit eur banne dour fresk!

GWENOLE, (*o sevel e zaoulagad*).

O! ar mouezioù-ze!... O anaout a ran!... Va mignouned int... (*Soubla ra e benn oc'h huanadi, ha prest goude*

e ra adarre eur zell war ar Re-Wenn). An Ao. Person!... Bennoz d'eoc'h, o va Doue!... Brema da vihana me a varvo laouen... gant bennoz ar beleg!...

AR CHOUAN (*a deu gant dour*).

Setu ama dour fresk, Ao. Kermoger!

AO. KERMOGER
(o walc'hi penn ar merzer)

Ne varvi ket c'hoaz, Gwenole, ni raio ker brao d'it ma c'helli kemeret adarre da vouc'hal a-benn eun nebeut deizioù ama. Satordallik! ni hon deus ezom sikour vat evit derc'hel penn d'ar chas glas! Alo! alo! Gwenole, va faotr, red eo kemeret kalon!...

GWENOLE (*oc'h anaout e dad a erru dirazan*).

O va zad!... Mervel a ran, her gwellet a rit, mes mervel a ran laouen... Great em eus va dever penn da benn. ... Difennet em eus va bro ha va Doue, rak mervel a ran evit beza nac'het diskara ar groaz-ma... Deuit, ma roin d'eoc'h ar pok diveza!...

AN TAD (*a lamm gant e vab*).

Va mab paour!... E pe stad e kavan ac'hanout!

AN AO. PERSON

Fizians hon deus d'her savetei pa'z eus c'hoaz eun elfen buez ennan!...

AN TAD

O va mab!... Va mab!...

GWENOLE

Kasit, va zad, va fok diveza d'am mamm vat... Karet em bije gwelet anezi a-raok mervel... Na ouelit ket, va zad... Lavaret ho peus d'in er mintin-ma: « Ma varvez dindan taoliou ar Re-C'hlas e vezin frealzet o sonjal em eus eur mab merzer en nenv o pedi evidon! » ... N'oc'h

ankounac'hain ket... na c'houi, na va mamm... hag eun deiz, dizale, ni a vezo unanet da viken!... Mervel a ran!... mes ar groaz a zo en he zav!... Ao. Person, ho pennoz, mar plij!... Eun absolven ziveza, en han' Doue!... (An Ao. Person a dosta, hag a ra sin ar groaz goustadik war Gwenole).

AN AO. PERSON

It e peoc'h, ene kristen, da welet ar Jezuz hoc'h eus difennet gant kement a galon!...

GWENOLE, (o tremen)

Bennoz Doue!... Brema e c'hellan mervel!... Kenavo. Ao. Person!... Kenavo, va zad ker... Kenavo va mignonet!... Kenavo ar Baradoz!... (An tad a ziroll da ouela dourek Gwenole a zoubl e benn, maro).

AN AO. PERSON

Maro eo ar Merzer! (An holl a lamm o zoksier). Trugarekaomp Doue, Breudeur ker, da veza roet d'eomp eun difenner muioc'h en nenvou!... Maro o tifen ar groaz!... Ha gellout a raffed kaout kareoc'h maro?... Ao. Kermoger, petra raimp-ni eus ar c'horf santel-ma?

AO KERMOGER

Petra livirit ober, Ao. Person?

AN AO. PERSON

Me gav d'in e vije mat douara anezan ama zoken, e-harz hag e skeud ar groaz eo maro eviti. N'hellomp ket ober kareoc'h. Petra livirit, va mignonet?

Pep hini a lavar e c'her

Mat!... Brao!... Ya da, Ao. Person!... Enor d'ezan!... Tan ha kurun!... Beac'h d'ar vuntrerien!

AN AO. PERSON

Tavit! Tavit! va mignonet!... N'eo ket d'eomp-ni eo venji!... Ar venjans a zo da Zoue!... An tammou traou glap-ma eo, petra raimp-ni diouto?

UNAN, n'eus fors piou.

O lezel da veza preiz ar brini hag ar bleizi, na petra 'ta!

AN AO. PERSON

N'hellomp ket ober ze, va bugale; ar garantez kristen a c'hourc'hemenn deomp bezia anezo ive.

AO. KERMOGER

O mat! lakaat anezo dre aze en eur park bennak!

AN AO. PERSON

Evel-se eo e raimp. Ha brema, ken a raimp al lidou santel, reketomp peoc'h d'an Anaon: *Requiescant in pace!*

AN HOLL

Amen.

(Al lien a gouez).



Taolen da echui

Eur groaz e goueled al leuren-c'hoari. — Gwenole en e zav, a zo e wreac'h gleiz oc'h ober an dro d'ar groaz, e wreac'h zeou a zalc'h krog en eur vouc'hal. Diskabel eo. Ar Vretoned-all a zo renket en daou du. Pa lakaer da zevi goulou « Bengale », eur strollad kanerien a c'heller kuzat e riboullou al leuren-c'hoari, pe dirak, a gan an daou boz-ma :

POZ KENTA (war don : Nous voulons Dieu)

Ni, 'vel gwechall soudarded ar groaz,

Ni, Breiziz, laromp war eun dro :

Ni zo da Zoue hizio, warc'hoaz,

Hag er vuez, hag er maro !

DISKAN

Klevit, Mari, Mamm Doue,

Peden ar bobl kristen :

Doue c'houlomp, Doue da Roue, } diou wech.
Doue gant e gomz da lezen }

EIL POZ

Ya, kent 'vit koll Doue, hon ferc'hen,

Ni a rofe hon holl vadou ;

Ni skuilhfe hor gwad war an dachen,

Hag a varufe 'vel hon zadou !

(Diskan)

KLAODA 'R PRAT,
« Pluenzir ».




KANAOUENNOU KLAODA 'R PRAT

evit ar vugale hag ar yaouankiz

1.

NETRA NA DALV VA BREIZ

Yea ha buhan.



Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
Diazezet war ar roc'h, leun a zero uhel ?
Ar c'hantvejou koumoulus, 'vel bandennou brini,
Hep he diskara nepred, o deus nijet dreist-hi.

Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
Eleac'h ma chom beo atao, en despet d'an avel,
Kredennou sakr ha pouezus oberourien hor bro,
'Vel pa vent korvigellet ouz grizioù an dero ?

Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
Eleac'h ma kêñ c'hoaz hizio ar barz a vonez uhel,
Gant telen ha biniou, evel en amzer goz,
Koulz ha ma ra en nenvou elez ar baradoz.

Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
Eleac'h eus eur yez ken koz, ken kaer, ken divarvel,
Bet komzet gant hon Tadoù ousten daou 'vil bloaz'zo,
Ar Brezoneg a garomp hag a virimp atao ?

Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
Eleac'h ma kaver ken stank labour flour ar gizel,
E pep parrez, koulz laret, war vein an ilizou,
Er berejou; en henchou, war galz a galvarioù ?

Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
A vir he gwiskamanchou hag he c'hizioù santel ?
Ar Vretoned a jomo bepred ar pezh int bet,
Ar bobl ar c'haloneka a zo ebarz ar bed.

Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
Hag a welas o c'henel enni tud a vrezel,
Brudet evel ma 'z eo bet Lez-Breiz ha Richemon,
Gwesklin, Arzur, Ponkalleg, Nomenoë, Klison ?

Hag anaout a rit eur vro henvel ouz Breiz-Izel,
Hag he deus gwelet barzed evel ma 'z oa Luzel,
Taliezin ha Gwenc'hlan, Gwilhou, Brizeg, Milin,
Kervarker, Prou, Yann, Ar Skour, hep ankounat Marzin ?

Ha komz a rin-me brema eus sent koz Breiz-Izel,
A skignas dre ar vro-ma sklerder an Aviel :
Kaourintin, Pol-a-Leon, Brieg ha Gwenole,
Ha tostoc'h, Mikeal Nobletz, an Tad Maner ive ?

Nan, n'eo gwir ? netra na dalv ha netra na dalvo
Kornig douar hon Tadoù, Breiz-Izel, hor Mamm-Vro !
Gened koz bepred nevez, da viken m'az karo,
Ha laouen me az meudo ken teui d'in ar maro.

Laromp eta, kenvroiz, laromp gant levez,ez,
N'eus ket e mesk ar broioù ken din a garantez.
E Breiz-Izel ouñ gaset, ganti ouñ bet maget,
Hag enni eo, d'am maro, e vezin douaret.

Eno va c'houk a vezo gant va zud koz reisoc'h,
Eno me a c'hortozo deiz ar varn vras e peoc'h;
Ha bemnoz, dre lanneier hag aochou Breiz-Izel,
Ene ar barz a gano c'hoaz meur a werz santel.

Landi, 13 Mezeven 1908.

KLAODA 'R PRAT,
(Pluenzür).

KANAOUEN AR VRAN

Eun de-vez, mes trez Bran wareur we-zen klu-
det A zal-c'he en he beg eur gram-poe-zen lar-
det : A - la - nig al-Lou-arn ar c'houez-se pa zan-tas, E-
vel eun tou-el-ler d'e-zi a la-va - ras : War an ton
tra tra la la War an ton tra tra la la War
an ton tra-de-ri-de - ra Ha tra la la !

— Deiz mat d'eoc'h, mestrez Bran, penaos ez it ganti ?
— E leat, mestr Louarn, brao 'walc'h oun, ha c'houi ?
Va bugale ive, nemet an diveza
Eo a zo gant an dreo, pemzek dez zo brema.

War an ton...

— O pegen kaer oc'h-hu gant ho sañzu impriz !
C'houi hoc'h eus sur lakea' he ober e Pariz...
— O ya, eme ar Vran, 'vel eur gagererez
A rofe da anaout d'it he c'hemenerezh.

War an ton...

— E fei, mar deo ho mouez henvel ouz ho tilhad,
C'houi a zo en tu-all d'an holl ganerien vat.
Grit d'eomp eta klevet ho mouez ker manifik,
Rak ebarz ho famith oc'h krenv war ar muzik...

War an ton...

Rak-tal an intron Bran, hep beza re bedel,
A c'hrosmol dre he fri an *Tour dantelezet* ;
Dre ma ranke he beg digeri da gana,
Ar grampoezen d'an douar zo lezet da goueza.

War an ton...

Alanig-al-Louarn a gonte mat war ze
Ha war er grampoezen e sailhas prim neuze ;
Evel eun tort e c'hoarz an tamm mastin iripon,
En eur frota e gof ha laouen e galon.

War an ton...

Trei a ra oc'h ar Vran, hag e lavar d'ezi,
O tont d'he c'haketel, d'ober gwap anezi :
— M'em eus ho paket brao, vil ez eo ho tilhad ;
C'houi n'ouzoc'h ket kana, mez ho krampoez zo mat !

War an ton...

Neuze an intron Bran a zo *ywaleüruzez*,
A zo dipitet oll, konfontet gant ar vez :
— O perak e teuer an duel da zifen ?
M'em bije da lazet gant eun tenn pistolen...

War an ton...

An holl lapoused-all o klevet koms diouzin
A deni d'am c'haketel betek dindan va min ;
Mestrez an holl vrini paket gant Alanig
Ne vo muioc'h doujet vit eul laouenanig !...

War an ton...

Klevit brema'r gentel eus ar c'houblajou-ma ;
Brini bras ha bihan, am selaouit brema :

KENTOC'H MERVEL !

Pa vo leun ho kenou gant ar c'hrampoez lardet
Serrit ervad ho peg m'ho ped ne ganit ket !

War an ton...

*Dastumet ha reizet gant
KLAODA 'R PRAT.
(Pluenzir).*

3.

KANAOUEN AR SKOLAER

Allegro Mod° Solo

Me zo eur skolaer yaouank - ber boel-lik ha c'hoarier,
ri-er, Ber-boellik ha c'hoarier, D'ar studi gan bem dez
Me ya en - dro di-
deuz ouz va c'hein ar sac'h ler. Me ya en - dro di-
zour-si bras ha di-nec'h, Me ya en - dro di-
zour-si bras ha di-nec'h A - to !

Me zo eur skolaer yaouank berboellik ha c'hoarier,
Berboellik ha c'hoarier,
D'ar studi 'z an bemdez ouz va c'hein ar sac'h ler.

KENTOC'H MERVEL !

DISKAN

Me ya en-dro,
Dizoursi bras ha dinec'h,
Me ya en-dro,
Dizoursi bras ha dinec'h,
Ato !

Abredik diouz ar mintin, da zeiz heur pe dre eno,
Da zeiz heur pe dre eno,
'Teu va mamm da hopal : Alo, Yannig, war zao !

Siouaz ! dre bep seurt amzer, heol bero, avel pe erc'h,
Heol bero, avel pe erc'h,
Me rank bale dillo, hep goulenn va dilerc'h.

Pa 'z an en hent d'an hanvou me glev son an alc'houeder,
Me glev son an alc'houeder,
Ha 'veltan e kanan meuleudi d'am C'hrouer.

A-wechou ken dizeblant, pa vez an heol o tomma,
Pa vez an heol o tomma,
Tigouez ganen dale er c'hoad da neizeta.

N'em beus ket a horolaj, hag an amzer ne c'hed ket,
Hag an amzer ne c'hed ket,
Rak-se ven divezat ha siouaz, kastizet !

Er goanv, war al lenn skornet, gant va mignon Kolaig,
Gant va mignon Kolaig,
Me gar ober nousped abaden risklaig.

Na diegi 'm eus goude 'kregi em leoriou studi,
'Kregi em leoriou studi,
Fidandoustik, me lar, ze n'eo ket eun dudi !

Koulskoude eo red poania, ya poania da labourat,
Ya poania da labourat,
Ma vezin eun dervéz meurbed barrek em stad.

O lezel ar ganaouen, deomp adarre d'al labour,
Deomp adarre d'al labour,
Magadur ar spered, pinvidigez ar paour,

KLAODA 'R PRAT,
(Pluenzir).

4.

Kanaouen neve Janed Ark

War dôn : *Sav, Breiz-Izel.*

DISKAN

O Janed Ark, truez ouz ar Frans !
Goulennit d'ho pro feiz hag esperans !

Kanomp, Breiziz, kanomp eur ganaouen,
Da Janed Ark, gwerc'hez Loren,
Enor ha gloar, mil ha mil meuleudi !
A-bouez hon penn laromp d'ez : (*Diskan*).

Plac'hig santel, du-ze e Donremi,
Abredik c'houi garas pedi ;
Hor bugale, er skoliou dibater,
Na glevont hano o C'hrouer. (*Diskan*).

Ho karantez evit ar Frans, ho pro,
A reas d'eoc'h skuilh daelou c'houero,
Oc'h he gwelet breset gant an estren,
A venne gounit betek penn. (*Diskan*).

Klevet a rit moueziou sentezed,
Mouez Mikel' zo digaset
Da gemen deoc'h ez oc'h bet dibabet
Da vouta'r meaz ar Zaozoned. (*Diskan*).

Ho soudarded, nijet da Orleans,
A sko kalet hep koll fizians,
Hag hepdale kear a zo digelc'het,
Hag an holl Zaozoned trec'het. (*Diskan*).

Da Reims, goude, ez it a-berz Doue,
Da lakat sakri ar Roue ;
Gant ho panniel, eno en e gichen,
Janed, na c'houi a zo laouen ! (*Diskan*)

Setu brema ho kefridi echu,
Ha distrei d'ar gear a reot-hu ?
C'hoant ho pije, mes ar roue Charlez
A zalc'h tost d'e zervicherez. (*Diskan*).

War an douar, alies an anken
A deu evel eur goumoulen,
Da zistaga tamm ha tamm hon ene
Dioc'h traou ar bed, evit Doue. (*Diskan*).

Evel Jezuz, c'houi a zo bet gwerzet
Hag en eur prizon du taolet ;
Evel eun oan, evit ho pro garet
E sakrifiks oc'h kinniget... (*Diskan*).

Ho vertuziou, ho feiz, ho karantez,
N'int ket bet manket eun dervez ;
Ho nerz-kalon er boan a oa padus,
Hoc'h izelegez (1) dudius. (*Diskan*).

Ha setu c'houi Plac'h eürus diskleriet
Gant hon Tad santel Pi dekved ;
Gwisket a c'hloar, kurunet a lili,
C'houi 'zo da viken en dudi. (*Diskan*).

Gwerc'hez Loren, kouls hag en hoc'h amzer
Tristidigez zo 'n ho pro ger,
Da Jezuz-Krist, d'e Vikel, d'e Iliz,
E reer pell 'zo eur brezel griz. (*Diskan*).

KENTOC'H MERVEL !

Siouaz ! kollet e vezimp, dizale,
 Mar na deu d'eomp skoazel Doue ;
 Evit ar Frans ho kalon lamm atao,
 Pedit, Doue ho selaouo !

DISKAN

O Janed Ark, truez ouz ar Frans,
 Goulennit d'ho pro feiz hag esperans !

KLAODA 'R PRAT,
 (Pluenzир).

Imprimatur :


Quimper, 21 Juin 1911

A. COGNEAU,
 vic. gén.

KENTOC'H MERVEL !

P'EDON WAR BONT AN NAONED

Allegro



P'edon war bont an Naoned,
 digoudi digoudaon,
 digoudaon ranflaon,
 Oeon taga raga digadiga daga,

P'edon war bont an Naoned
 'C'hen em zivertisa.

Me gwelet eur plac'h yaouank
 'Lez ar ster o ouela.

Ha me goulenn diouti
 « Na perak e ouele ? »

« Va gwalen aour, emezi,
 Er mor a zo kouezet. »

« Petra rofet - hu d'in-me
 Me yelo d'he zapa ? »

KENTOC'H MERVEL !

« Hanter kant skoed, emezi,
Roin deoc'h a galon vad. »

'Vit ar genta plonjaden
Netra n'en deuz gwelet.

'Vit an eilved plonjaden
Ar walenn zo touchet.

'Vit an drede plonjaden
Ar paotr a zo beuzet.

E dad a oa er prenest,
Ha diroll da ouela.

Tri mab am euz-me ganet,
O zri ez int beuzet.

E bered sakr an Dreinded
O zri e vint besiet.

*Kanet d'in gant F. Guillou, eus Kervalliant, eun niz
d'an Aot. Guillou, ar skrivanier bras.*

J.-M. PERROT.



KENTOC'H MERVEL !



« Hanter kant skoed, emezi,
Roin deoc'h a galon vad. »

'Vit ar genta plonjaden
Netra n'en deuz gwelet.

'Vit an eilved plonjaden
Ar walenn zo touchet.

'Vit an drede plonjaden
Ar paotr a zo beuzet.

E dad a oa er prenest,
Ha diroll da ouela.

Tri mab am euz-me ganet,
O zri ez int beuzet.

E bered sakr an Dreinded
O zri e vint besiet.

*Kanet d'in gant F. Guillou, eus Kervaliant, eun niz
d'an Aot. Guillou, ar skrivaniar bras.*

J.-M. PERROT.

